

Le Maréchal (Moustoer-Logunec'h 1878 –Oluwigner 1945)

Kousk Breiz-Izel

An heol a zo kuzet, setu echu an de'
Me 'ghev ar hloh o tintal an Ave.

Diskan

Kouks, kouks, Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an noz o tond war an douar.

Kousk,
Breiz-Izel, bro ken mad,
Trouz ar mor braz a zav d'az luskellad.

C'hwez vad an ed en bleun, hag al lann alaouret
War ar mêziou, gand ar gliz-noz a red.

Ar vaerien a gan o tastum o loened,
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrouz, me 'ghev kan an eostig,
Telenner noz, sonit flour ha dousig.

An neb a hwez bemdez a hounid e repoz,
D'an dud vad, Doue en-deus greet an noz.

'Uz da Vreiz o skeudi, an neñv steredennet
A lavar 'zo eun Doue ouz on hared.

Breiz-Izel, douar sakr, a-greiz-kalon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar.

(Abad e oa Marechal. Kanet e vez kalz ar ganaouenn-mañ, mez cheñchet e vez aliez geriou 'zo).